

# SILVESTRIC

---

I

AN TAD . . . Etre Chapel Sant Efflam ha tossen Mene-Bre  
 'Zo eun offiser iaouank ganthan eur pez kleze  
 'Zo eur c'habiten iaouank o sevel eun arme :  
 Me 'meuz eur mab, Silvestric, a lavar mont ive.

II

Siouaz ! Autrou kabiten, ne meuz mab nemethan  
 Ganen c'hui 'po 'r vadelez da lezel anezhan  
 AR c'HABITEN. — Ganeoc'h, denic ancien, me a zo souezet  
 Touchet en deuz an arc'hant ; d'an arme 'rank monet.

III

AN TAD . . . — Hast affo ! eonic bihan, nj 'trezec an arme  
 Evit gouzout hag ema Silvestric en bue  
 AL LABOUSIC . . . — Demad d'eoc'hui, Silvestric, demad a lavaran !  
 SILVESTRIC . . . — Ha d'id iveau eon bihan, p'out deuet betec aman !

IV

Disken, va eonic bihan, diskен var da zaou droad,  
 Ma scrivin d'id eul lizer da gass d'ar gær d'am Zad.  
 « Iac'h eo ho mab Silvestric ! a lavari d'ezhan  
 Ha gant joa e tistroio abars neubeut ama. »

V

AN TAD . . . Pa voan ebars em guele, em guele cousket mad  
 Me 'clevet Merc'hed Roudour o cana sôn va mab  
 Ha me 'trei ouz ar voger hag o commans voela  
 Autrou Doue ! Silvestric, pelec'h emaout brema ?

VI

*Pa voa an tad desolet oc'h ober he glemmou*  
*Setu he vab, Silvestric, 'toul an or, o selaou*  
 SILVESTRIC . . . — Ehanit, tad ankeniet. ehanit da lenva  
 Sellit ! Ho mab Silvestric a zo deuet ama !